

ABDELKADER KAMAL

Ur wezh e oa ur paotr bihan, e anv Abdelkader Kamal, en ur geriadenn En-Tu-All-d'ar-Menezioù e Korsika.
Pa oa lavaret dezhañ :

-« Met, eus pelec'h emañ o tont gant un anv e-giz-se ? »

E responte bewezh :

-« N'ouzon ket eus pelec'h emañ o tont, met gouzout a ran ez on degouezhet amañ war Stêr ar Golo, diouzh ar mintin , e-barzh ur paner aozilh, geot sec'h ennañ. Un dro-c'houzoug a oa a-istibilh d'am gouzoug ; skrivet e oa warnañ : Abdelkader Kamal. Ma anv eo, ma hini eo.

-« Met ne c'hellez ket bezañ Korsad gant un anv a seurt-se ! Piv eo da vamm eta ? » a lavare ar vugale.

- « N'ouzon ket piv eo ma mamm, a responte Abdelkader, met gouzout a ran ez on bet degemeret gant Maria Francesca ; hi eo he deus maget ac'hanon ; hi eo he deus roet he laezh din da zenañ.

- Maget out bet gant he laezh ; gallet he dije roiñ un anv dit ivez, un anv eus dre amañ, petra ! » a lavaras Dominique Mattei na zeue ket a-benn da zistagañ Abdelkader Kamal.

-« Selaou, bihan » a lavaras Mario Paoli vras « N'ez teus ket c'hoant e vo cheñchet da anv ; n'az teus ket c'hoant da gaout un anv savet ; diskouez deomp neuze ez teus c'hoant da zont ur C'horsad penn-da-benn. Ur C'horsad da gentañ a anavez plant ar strouezheg. A-benn arc'hoazh neuze ez i d'ar strouezheg hag e tegasi deomp ar re a ziwall diouzh « ar gazel-ge » ha diouzh ar c'hleñvedoù ... hag arabat faziañ ! Gwelet e vo goude-se ».

Ne oa ket bet dav lavaret div wezh da Abdelkader. Ne oa ket o soñjal gortoz betek a-benn arc'hoazh; mont a rafe diouzhtu d'ar strouezheg. Derc'hel a rae d'e anv avat, e-giz ar c'hasker-boued d'e wenneg diwezhañ.

E hini e oa, an hini a oa bet roet dezhañ, kasi-sur gant e vamm. Ouzhpenn-se, n'en doa ket ezhomm eus ul lesanv. Mont a reas ar bugel da glask keloù gant Maria Francesca da gentañ ; hi a ouie mat peseurt plant a ziwall diouzh « ar gazel-ge » ha diouzh ar c'hleñvedoù : bez int an delioù lore, an delioù troierez hag an delioù meurta. Klask a reas Maria Francesca en hec'h armelioù-moger hag e kavas skeudennoù eus ar plant-se ; roiñ a reas anezho da Abdelkader en ur lavarout dezhañ :

-« Kerzh, paotr, kerzh er strouezheg a-uc'h an ti ha degas ar plant-se ganeoc'h. Diwall da goll da hent . Met gortoz un tamm a-raok mont kuit ».

Mont a reas Maria Francesca da gerc'hat an delioù lore a oa dalc'het prizius ganti en hec'h armel. Silañ a reas anezho en ur sakod lien hag e lakaas anezho dindan roched Abdelkader.

-« Diwallet out bremañ, bihan ; ne c'hoarvezo droug ebet ganit bremañ. Kerzh !

Abdelkader a gemeras an hent en ur lavaret chuchumuchu :

-« C’hoant am eus da zerc’hel ma anv Abdelkader Kamal ; ma hini eo. N’eus ket droed da cheñch anezhañ din. Ar plant-se, e kavin anezho hag e tegasin anezho d’ar baotred-se ! »

Kregiñ a rae an heol da guzhat a-dreñv ar menez pa glevas Abdelkader un trouz delioù joget. Ne daolas ket kont dre ma kredas e oa ur c’hazh o chaseal logod-mors da vare ar serr-noz.

-« Aze ez eus lore » a hopas o welet ar frouezh ruz. Troc’hañ a reas meur a vrak.

-« Aze ez eus troierez ; flemmañ a ra ma bizied ! Aze ez eus meurta gant e frouezh bihan du ! »

Kregiñ a reas trouz an delioù joget en-dro ; klevet e oa kriadennoù bihan heñvel ouzh klemmoù. Goude bezañ pozet e vrankoù war an douar, en em lakaas da glask. Klask a reas e-pad pell dindan ar gwez bihan hag e-barzh an toulloù, met, netra tout ... En un taol en em lakaas da hopal :

-« Ur pemoc’h-gouez bihan ! ur pemoc’h-gouez bihan ! »

Al loen a oa gloazet e droad ; klask a rae heuliañ ar bugel en ur chom pell. Abdelkader a gemeras anezhañ en e zivrec’h rak ne oa ken nemet ur pemoc’h bihan tre. Lavarout a reas dezhañ :

-« Emaon o vont da ziskouez ac’hanout da Varia Francesca. Gwelet a ri, ober a raio war da dro e-giz he deus graet war ma zro. Ha bremañ, deus da welet ar plant am eus dastumet ; diwallet e vi ganto : aze emañ al lore, aze emañ an droierez, aze emañ ar meurta. Anavezout a rez ? C’hwezh ar c’hwezh-vat-se ! Deus bremañ ! »

Kregiñ a reas Abdelkader da vale, da vale, da vale, met e-barzh ar strouezheg n’eus hent ebet ; ouzhpenn-se e oa deuet an noz du. Deuet aon d’ar bugel, e krogas da leñvañ. Derc’hel a rae atav ar pemoc’h bihan, stardet mat en e zivrec’h, memestra.

-« Hama, a lavaras, emaomp o vont da gousket amañ hag a-benn arc’hoazh e vo gwelet. Soñjal a rez e-giz din ? » a lavaras d’al loen en ur sec’hañ dour e zaoulagad. Chugudet e-barzh un toull gant al loen, e teuas ar c’houk buan.

Pa oa savet an heol, e kemeras an hent en-dro, ar pemoc’h dindan ur vrec’h, an tammoù brankoù dindan eben. E traoñ an draoñienn e wele bremañ ti Marie Francesca hag an dra-se a domme e galon dezhañ. E-barzh al liorz e oa Maria Francesca hag ar baotred o c’hortoz anezhañ ; ankeniet e oant.

-« Emañ o tont ! Emañ o tont ! » a hopas Maria Francesca, kerkent ha ma welas anezhañ oc’h ober e hent er strouezheg, eeun a-uc’h an ti.

-« Met petra zo deuet gantañ ? » a hopas ar baotred.

Pa ziskouezas Abdelkader ar pemoc’h-gouez bihan dezho, ne soñjas den ebet ken er plant. En em lakaat a reas pep hini da glask un tamm plouz fresk hag ur banne dour d’al loenig. Maria Francesca, hi, a aozas ul louzoù gant ar meurta hag an droierez, da louzaouiñ ar gloaz.

-« Graet e vo Here eus outañ » a lavaras Abdelkader.

-« Ha te, e vo graet Abdelkader Kamal eus ouzhit » a lavaras Mario Paoli.

E-giz-se, neuze, e teuas Abdelkader Kamal da vezañ ur gwir Gorsad. Koulz lavaret, da nebeutañ, rak ne oa ket par dezhañ war anvioù ar plant, ar re a ziwall diouzh « ar gazel-ge » ha diouzh ar c’hleñvedoù ; pa oa deuet bras e kane brav tre « a paghjella » (*), e zorn war e skouarn, met ne faotas ket biken dezhañ, nann biken, chaseal ar moc’h-gouez.

(*) kan liesmouezhiek Korsika.

André Cornec

Inspecteur de l’éducation nationale
Chargé de mission académique langue bretonne